

# CANTIC AR BURETE.

*Var un ton never.*

**S**ELAOUIT oll, tud yaouanq, ur gueleñnadurez  
SA so meusbet prosiapl vit ho silvidiguez,  
Da viret ar Burete evel ma zeo dleet,  
Da Jésus, güir Vab Doue, Pried ar Guerc'hëset.

Calz a glêvo ar Vèrz-mâ, haet a vezò factet  
Balamour d'ar virionez so enni disclêryet :  
An den clàñ e zaoulagad n'ell qet sellet an de,  
Nac ar re a so coupabl clêvet ar virione.

Ar sujet eus ar Verz-mâ eo ar fragilité  
Demeus ar merc'het yaouanq re scàny a volonté  
Allas ! guelet rêt gante alies glac'haret  
O zadou hac o mamou, goude o beza maguet.  
Ar re a so vertuzus n'en em offançont qet  
Vit laret ar virionez d'ar re so imparfet :  
Doue a gommand qelen ar re oboissant,  
Ha fixa bars en hent mad ar re so variant.  
Allas ! pelec'h ma'n amzer ma voa'r merc'het  
contant

Da exposi o c'horfou d'ar maro, d'an tourmant ?  
Guell vise gante beza losquet ha merzeriet,  
Qent egdet e nep fèçon offansi o guerc'hdet.  
Pa annonças Gabriel d'ar Verc'hes gloriis.  
E voa choaset gaît Doue da veza Mam Jesus,  
E laras d'en em excus penos ne vise qet,  
Mar bise dre an dra-se offançet e guerc'hdet.

Ne zeus tra var an douar a vez a vrassoc'h pris,  
Ma caremp, consideri, eguet an honestis;  
An oll aour, an oll arc'hant, hac ar mein precius,  
E comparéson dezi a so traou disprisus.

Pà vez collet au arc'hant hac iveau al leve,  
Gant poan a so c'hoas moyen d'o gommit adare;  
Mes mar collit hoc'h enor, ha fallout e recour,  
Qement den a so er bed n'allint qet ho sicour.

Enor ar merc'het yaouanq so evel ur veren,  
A sp' facil da desti, pe evel paper guen,  
Pebini gant ur bloue goude beza scrifet,  
Svit poannia e vecl'hi james ne ve grêt net.

Greomp c'hoas comparéson ons ar foudilisen  
Hac an tezor precius, enor ar sumelen :  
Ar foudilis so brillant pa zeuer d'o sellat,  
Mar o zoucher gant ar bis, e collont o guenat.  
Allasl siouas, tud yaouanq, pa brometer de ze  
Comzou caer, fidelite, ha pep seurt carante,  
A zo sabil da gredi, qen a vezint tromplet,  
Ha goude pad o buez e chomont glac'haret.

Lucifer abromete da Eva, da Adam,  
Svit debri eus ar frondez n'o divije nep blam;  
Allas! hac e voent tromplet : hac evelse bremâ  
E tromplet o bugale dre lies promessa.

Allasl gant an dea yaouanq so preisan aerouant  
Goude glac'hari o zad, o mam hac o c'herent,  
Pa na guerdat conservi dreist peb tra o enor,  
A en talz preciussoc'h eguet cant mil tezor.

Allas! an tad hac ar yam a yo iveau daonet  
Brometer d'o bugale, par l'o c'hormajout qet;



Evel an douéder ar fruez a repoter d'ar guer,  
E zeo d'an tad ha d'ar vam buez ar vugalez.

Ar blanten pa vez yaouanq a bleg gant pebarel,  
Exit e derc'hel eün e zeo ret he sevel :  
Evelse ar vugale, ma na vent corriget,  
A blego dindan ar bee'h an natur corrompet.

Rac-se, tadou ha mamou, pa oc'h eus bugale,  
Mar fell dêc'h beza divlam abalamour dese,  
Na lezit-y qet da vont da nep seurt assamble  
Na vo unan ac'hanoec'h, pe o c'herent gante.

Ne zeus den var an douar a nep seurt qalite,  
Ma na gar laqat eyes, na gollo e ene;  
Liessoc'h a zrouc-speret a so o tarnijal,  
Eguet so a gueffien var dro un aneval,

Ne zeus na foar na marc'hat, pardon na nep  
andret,

N'en em gay ha Lucifer bac e gamaradet,  
Equis bleizi arraget pere a so subtil  
Da drompla an dud yaouanq pere a so fragil.

O kezel an dud yaouanq re en o liberte,  
Eus o muzur discredet gant re a vanite,  
E roer sujet dese d'en em rî d'ar pec'het;  
Difficit eo n'em viret pa vezet commancet.

Ar Roué an oll fûrnez en devens lavaret :  
Nep a gar re bugale a vezel glac'haret ;  
Rac deiz ar Varo general hep mar o devo blam,  
Pa rei bugale daonet matlos d'an tad ha mam.

Me ho conseill, tud yaouanq, da viret chasteate  
Evit renta Jesus-Christ amourous hoc'h ene e  
En em gonsacré dezàn bac e vezel eurus;

Biscoas ne voe servicher ha qer carantezus.

Jaeob, evit eureugi merc'h an ingrat Laban,  
A chomas abet sez bloaz er fatiq hac er poan ;  
Jesus so deut er bed-mâ d'eureugi ur vestrez,  
En deus, balamour dezi, finisset e vuez.

Satan clân hac anvius o velet omp'choaset  
Da boszedi ar plaç caër en deus dre gloar collet,  
Mar gall hon laqat da goll un teñzor precius,  
Evit ma facho ouzomp' hon Redemptor Jesus.

Mar fell dêc'h beza divlam, n'en em gavit  
nepret.

An eil sex gant eguile assambles da brezec,  
Rac an occasionou a so re danjerus;  
Nep en deus o approuvet a so bet maleurus.

Na ouffe den toucha pég na ve'zaouarn-souillet,  
Na querzel var glaou ardant ne vo e dreid poaset;  
Evelse an dud yaouanq an eil gant eguile,  
Pa ve Sent ba Sentezet, e ossançon Done.

Den n'en deveus ar furnez en devoù Salomon,  
Nac iver qement a nerz evel en doa Samson.  
Evit o nerz, o furnez, e zint en em gollet;  
Nep a gred ar virionez, a velo dre effet.

Elec'h laqat ho corsou e fatic hac e poan,  
Mar chounit hep exerciç, ec'h arruo Satan.  
Da invita, da laqat traou sot en ho calon;  
Ar goir voyen da drec'hi eo yun hac orêson.

Mari Egyptianes ha Mari-Madaleñ,  
Agunduas ur poulsat ur vuez disordren,  
Ha penevert ar gastel rezont d'ho c'horfou,  
E veat bremâ o lesqi e creiz an iferneu.

Pa os'n Autron Sant Anton e bars en ermitach,  
 O combati ous Satan oultan leun a arrach,  
 Pa voat en e orêson, e save avichou.  
 Evit ober exerciç, rîi è gorf d'ar poaniou.

P'en em gav daou zen yaouanq an eil gant  
 éguile,  
 Sonjont emedi Doue presant en o'ene;  
 Merqa ra'an oll öuvrou, comzon, sonjesonou,  
 Varben ma zaïnt dirazan da rent a o c'hontchou.

Soujomp ouspener stravill a vezo o clêvet  
 Mouez trampillou an Allez, pa finisso ar bed,  
 O soumeti pêb-unan d'en em gavel presant;  
 Den n'allo bez a exant evit aour pac arc'hant.

Petra rañ ar bec'herrien pa vezo digoret  
 Al leor eus o c'houstianç o devezo scrifet;  
 Pa vezo grêt hor setanç, divezat vo gouela,  
 Divezat vezo neuze fallout e c'horrija.

Mar deù goalsonch ergalon, goulennit diouti,  
 Goude plijadur ar bed hac bi allo souffri  
 An tau grevus en ifern, pa ne allomp aman  
 Anduri var hor c'hrroc'hen ur fulennic bian?

Un Ermit, solicitet d'ur pec'het dishonest  
 Gant er fewelen mechant, en em diviscas prest,  
 Hac en em strinpas en tan, o lavaret dezi:  
 Aproûvomp e recompanç qent monet da bec'bi.

Erfin, laquit evez mat ous ho santimanchou,  
 Ho pemp sqiant naturel; ar re-se ho tougo,  
 Ma na guerit dioüat, piz, da souilla hoc'h ene,  
 Evel ma eure David guechall gant Betbsabe.

Qeitama zomperbed-mâomp e danjer bepret,

Abalamour d'hon'natur so dougoet d'ar pec'bel;  
 Ar goinbat a so livret etre Satan ha ni,  
 Ret eo deomp-ni caont courach , mar fel deomp  
 e drec'hi.

Petra sonch ar bec'herien, evit daou na tri de  
 O deus da chom er bed-mâ , coll an eternite ,  
 Hac int oc'h allout beza corf hac ene contant  
 Er barados da vijen , hep anui na tourmant.

Clêvel oc'h eus ar voyen , mar querit e miret ,  
 Evit en em brepari da gaout da bried .  
 Jésas , mar en desirit , ma na ellit gorlos ,  
 Er Sacraament an Auter e cavot ho repos.

### CANTIC VAR AN IMPORTANÇ EUS AR ZILYIDIGUZ.

**P**ETRA servicho da un den  
 Oll gloar ha pompoù monden ,  
 Hac e ve mestr vak ar bed oll ;  
 Mar da e ene , siouas , da goll !  
 Petra servicho dit , den avaricius ,  
 Da aour , da oll arc'hant , da denzor precius ?  
 Pa vez da-unan mestr er bed universel ,  
 Mar coez da ene paouer er flammou eternel ?

*Var ar presanç a Zoue.*

Mar oc'h eus c'hoant da gourmetti ur pac'het ,  
 Glasquit ur plaq a vero'uz ha seurtoz ,  
 E pehini Doue n'ho quele qet ,  
 Hac eno geit hardis ar pez a gueret

*In manus tuas.*

Etre bo taouarn , va Doue ,

E recommandan va ene :

Va Doue , c'houi os'tr eos va frenet ;

Ma n'en deus chenchamant ebet,  
Na vet qet caus mar ben collet.

*A enep ar fals mignonet.*

E prosperite pa vezet,  
Ho pezo monahr a vignonet;  
Mes mar tres ar rod fortan  
Control déca , n'ho pezo nicun.

*Var an doujanc Dom.*

Bout en deus treid plom , n'en ém hast tam ebet  
Da d'missa erion ar pec'h'her obstat.  
Dioüallomp gouscoude ; ouarn eo e zaou dorn,  
Pa en deus tir gortoset , e crog bete'n ascorn.

*Var an heur incerlen eus ar maro.*

Pa ne ouzoc'h get ar plac , an lieur hac ar mormet  
Gant ar maro traitour ma veat ataqet;  
Gortoit-hi e peb plac e peb heur ha'monet,  
Evelse choui a viro ma vezot isurprenet.

*Var ar memes sujet.*

Ma ouffac'h evit certen n'o pe gen an atoet  
Da veva var ar bed-ma nemet ur mis auzier,  
Choui ho pe regret certen da veza impliget  
Hoc'h amzer da gundai ur vuez débordet.

Ha gouscoude e c'hoarzit hep sonjal tam ebet  
Noc'h eus qet nac ur moment nac un lieur assuet;  
Marteze abars en nos aliac'h beza jujet  
Hervez ho merit , d'an tan pe d'ar guir joallat.

*Var ar goad Góvession.*

Credit certain hac assuet,  
Ma pa zeus chenchamant ebet  
Ne dal tra ho covession ;  
Rac-se dioüallit , va mignon.

*Oréson a enep an teir goalen a gast.*

Ni ho suppli , O va Jesus !  
Dre hac'h hano garantezu .

Da gass pell dious hor c'harler  
Qernes , ha bocen , ha brezel.

*Orison da Sant Gueltas.*

Autrou S. Gueltas, c'housur gallout bras meurhet  
Digant Doue a enep ar oll chaç arraget,  
Preservit e peb amzer ho cuir servicherien  
Dions chaç clan , hac iveau diouz pep seurt angen ;  
Ni ho ped hac ho suppli eus a greiz hor c'balon  
Da chasseal ar voalen-se pel dious hor c'banton.



**CANTIC VAR AR MARIA MATER.**

**O** Guerc'hes Vari , Mam a c'braç ,  
Ha Mam a druez e peb plaq ,  
E peb amzer hor preservet  
Por ha uet dious peb pec'het ;  
E peb amzer hor preservet  
Diouz griffou an drouc-speret ,  
En heur ar maro pa vezimp ,  
Guerc'hes Santel , roit sicour dimp ;  
Neuze recevit bon ene ,  
Ha presentit-hi da Zoue.

Rentomp gloar da Zalver ar bed ,  
Zo het gant ar Verc'hes ganet :  
Rentomp gloar d'an Tad Eternel ,  
Hac iveau d'ar Speret-Santel .

Ra vero Doue hep fin meulet  
Gant an oll Zent hac an Ælet :  
Ra vero meulet hep paoues  
Bremâ hac er fin da james.



FIN.

**AD MAJOREM DEI GLORIAM.**

---

E Moutroulez , eus a Imprimerie LÉDAN.